


Kantik Sant Vaudez

Patron Chapel Koat-Vaudez en Parrouz PlaeraneK

War don : *D'hon Mamm Zantez Anna*



DISKAN

6

Zant Vaudez biniget
Hon Tad karantezuz,
Tud PlaeraneK ho ped,
D'ho ren daved Jezuz,

1

E keit ma oac'h bugel,
Eus ho tud oac'h zentuz.
Fur ha dous 'vel eun el,
Da bidi aketus.

2

Ma vo hon bugale,
Zant Vaudez biniget,
Leun a doujans Doue,
Zentuz, dibec'h bepred !

3

Hag evel den yaouank,
Ho nerz hag ho bue
A vo gwelet hep manK
Da serviji Doue.

4

D'ar yaouankiz roet,
Donezon ar furnez ;
Ha ma vo difennet
Gante ho Fe hep mez !

5

An holl meulodio,
D'ho renk a oa gleet ;
Brudet oa hoc'h hano
Ha dispar ho kened.

Met. mado, enorio,
Ec'h eus bet disprizet ;
Ma vo hon c'halono
Dioute distaget !

7

Vit serviji Doue
E kuitaet ho pro,
Hag en Treger neuze
E luc'h o vertuio.

8

D'ar Vretoned neuze,
Gant komzou leun a dan,
C'heus disket ar gwir fe,
Ha karet ho nesan.

9

En hon tiegezio.
Grêt ma vo enoret,
An tado, ar mammo,
'vel m'eo gourc'hemennet.

10

Goude 'n eun enezen
Leun a amprevaned,
'Neur ober pinijen
Ho pue achuet.

11

Gant spont al loened fall
Gemer kerkent an tec'h ;
Grêt d'imp war an dud fall
Bean da viken trec'h,

12

Piou biken a c'hallo
Lâret ho zantelez
Niver ho purzudo
Hag oc'h holl madelez ?

13

Benoz 'ta d'hon farko,
D'hon labour, d'hon loened ;
Grêt ma vo hon foanio
Ganimp zantifiet.

14

Benoz d'imp n'in ive,
Zant Vaudez biniget,
Goudouzoc'h hon bue
A zo meurbet kalet.

15

Ni fell d'imp, zant Vaudez,
Heuilh oc'h holl vertuio,
Kerzet bepred hep mez,
War ho lerc'h d'hon gwir vro.

16

Ha goude eur vue
Dibec'h ha digatar,
Drez-hoc'h, kaout en Env
Lodenn ous ar gwir gloar.